




## PATROUNAJ JEANN D'ARK

BRÉLÈS



# PARDOUN YAN-VRAZ

Var an tôn koz : AR FLEUREN ZO KOANT

1

Mên eo Yannik a Benprat  
Eur c'hanfart a zoare. (bis)  
Poent zo bet, c'hui oar ervad  
E karien va banne !

DISKAN

N'eo ket brao, Jakou { bis  
Ober re gorvajou }

2

Allaz ! diouz ar vezventi  
Yannik 'zo dizounet ! (bis)  
Birviken ne danvin mui  
Ar strob-jakez daonet !

3

N'ez ket pell e Treouergat  
Oan bet o pardouna : (bis)  
Hag e moa great eur sac'had  
Ken na vennen sounna !

4

Diouaz an noz o tont d'ar ger  
Edo round va boutou, (bis)  
Hag e moa kalz re d'ober  
O tougen va bragou.

5

'Voue ket pell e kreiz ar foz  
Oan kuezet er vouullen : (bis)  
« Dêl, paotr Yan, da hini goz  
En do traou da gempen ! »

6

Eur c'hi dù d'am zaludi  
A dostaz em c'hichen : (bis)  
« Dêl, paotr Yan, divar da fri !  
Guel a tom ar zouben ! »

7

Eul laer a dostaz d'he dro  
Ha iao d'am godellou : (bis)  
« Dêl, paotr Yan, hag ast affo  
Kerz 'ta var he roudou ! »

P'erruiz ' kichen va zi  
 Oa mouget ar goulou : (bis)  
 « Digor d'in an òr, Mari,  
 » Krena ra va memprou.

» En han' Doue Mari baour  
 » Souben an anduillen : (bis)  
 » Erru eo Yannik d'ar gear  
 » Mezo 'vel eun druillen. »

Mari-goz gant he fenn-baz  
 A zired eb dale : (bis)  
 « Petra velan, kalken vraz,  
 » Mezo dall adarre ! »

Ha dao d'eï var va diskaoaz  
 Va c'hein ha va zailler (bis)  
 Dre ma iuden, gwassoc'h gwass  
 E lope va c'houmer.



Zim ha boum a gleiz a ziou,  
 Ruillet ha diruillet (bis)  
 Anter-dorret va c'hostou  
 Va c'hoc'hren persuet !

Etouez al loened er c'hraou  
 Var an douar kalet (bis)  
 Oen kasset da skrabat laou  
 Da roc'hat, da gousket.

Anfronoz etre ma oan  
 Oc'h eva leaz ribot (bis)  
 E sonjen en 'va-unan :  
 « Red eo beza darzot. »

« Birviken mui na evin  
 » Keït a ma 'm bo buez (bis)  
 » Na kougnak, na rhoum, na jin  
 » Na dour betterabez ! »

P. TR.

## PATROUNAJ JEANN D'ARK

### BRÉLÈS

# Jeannet ar Briz-Vourc'hizez

(Var eun ton euz bro Douarnenez)

1

En deiz all da Lokournan e oan eat dâ gerc'het  
e oan eat da gerc'het  
Deuet gant an train deuz Pariz, ar plac'hik koant Jeannet.

#### DISKAN

Oh ! lon-yé ac'haoup !  
Deuet fin ar bed,  
Mignonned  
Deuet fin ar bed, }  
Me gred !      } bis

2

Allaz, allaz ne gaviz — e leac'h eur plac'hik koant (bis)  
Nemed eun tam kiniden, spountuz he guiskamant.

3

Jeannedik he doa troket — he dillad Breizadez (bis)  
Ouz eur bern truillou lorc'huz, deuz Paris pe Londrez !

Var gern he fenn eur pez-tok — evel eur vassin vraz (bis)  
Goest da zisheolia Jeannet, Cathou, ha tintin Soaz.

E touez he bleo oa sanket — eur foulternad nadoz (bis)  
Gwest da sklasi he galon, da Yan vartolod koz !

Marvad n'eo ket pinvidik — Jeannet va berjelen (bis)  
Rak dre he sae toull didoull e velet he c'hroc'hen.

Marvad en he honestiz — (n'euz ket a fizians kaer) (bis)  
Gant he roben eo strobet evel eun ounner laer !

Marvad var bal he daouarn — ar bleo a zo savet : (bis)  
Gant manegou ler melen he deuz ho goloet !

» — Allo, eme Janedik — me ne resevan ket (bis)  
» Rebechou digant potred n'int ket « sivilizet » ! »

Ha me a trei va seuliou : biken eun ounner laer (bis)  
· Da di va c'herent d'in me ne devio da verc'h kaer.

P. TR.

